

23^{añ} Nevez-amzer ar varzhed

PRINTEMPS
DES
POÈTES



Renseignements

Mediaoueg
Plasenn Auvelais
22310 Plistin
02 96 35 60 42
mediatheque@plestinlesgreves.com
www.mediatheque-plestinlesgreves.fr



LE DÉSIR

23^e PRINTEMPS DES POÈTES
DU 13 AU 29 MARS 2021

PRINTEMPS
DES
POÈTES

Soutenu par



GOUVERNEMENT
de la République
française

CONCOURS DE POÉSIE
jusqu'au 20 février
Spectacle ~ remise des prix du concours
vendredi 19 mars 18h An Dour Meur



1024 - 1024

IPNS O.C.M. 2020

« Nevez-amzer ar varzhed » - REOLIADUR AR C'HOÑKOUR BARZHONIEZH digor betek an 20 a viz C'hwevrer 2021

Digor eo ar c'honkour barzhoniezh aozet gant **Mediaoueg** Plistin d'an holl e Frañs a-bezh, ha tri rummad divyezhek a zo ennañ : **"yaouank", "tud deuet" ha "tud a vicher", e galleg pe e brezhoneg.**

Kasit ho parzhonegoù, bizskrivet pe domskrivet, ur bajennad A4 a hirder dezhe d'ar muiañ, o plediñ dre ret gant an dodenn lakaet er bloaz-mañ gant « Nevez-amzer ar varzhed » : **Ar c'hoant**

Gant ar barzhonegoù e vo lakaet daveoù ha oad ar gonkourerien, ha kaset e vefont dre bostel da **mediatheque@plestinlesgreves.com** pe, a-hend-all, dre lizher post da **« Nevez-amzer ar varzhed » - Mediaoueg - plasenn Auvelais - 22310 PLISTIN** peotramant c'hoazh laosket war-blas.

Darempred **02 96 35 60 42** pe **mediatheque@plestinlesgreves.com**

Kemer perzh er c'honkour a zo evit mann hag a dalvez bezañ a-du gant embannadur nanngopret an oberennoù gant **ar Vediaoueg**, ispisial en dastumad barzhonegoù a vo embannet goude ar c'honkour ha kavet da amprestiñ e mediaoueg Plistin.

« Reiñ ar prizioù » a vo graet d'ar **gwener 19 a viz Meurzh da 6e d'abardaez** e Sal An Dour Meur e Plistin. Ar re ac'h ay ar prizioù 1^{añ} gante a vo profet dezhe ur goumanant ur bloaz da vediaoueg Plistin, pe plasoù evit arvestoù e Sal An Dour Meur, pe plasoù e sinema An Douron. An holl genstriverien a vo aze en deiz-se a resevo levrioù.

« Pebezh nec'h don, pebezh c'hoant da gaout un dra all,
Estreget ur vro, ur pennad amzer, ur vuhez,
Pebezh c'hoant, marteze temzoù-ene all... »

A estlamme Fernando Pessoa indan maskl Álvaro de Campos. E portugaleg ivez e vezer liammet ouzh ar stered gant ar c'hoant. Rak an « dezir »-se zo kouezhet war-eeun eus ar stered hag ar c'heuzioù latin : eus sidus, sideris e teu desiderare. Evel un oabl o lintrañ gant an ezvezañsoù. Evel un mell dedenn bras n'haller ket bevañ hepañ. Ur c'hoant kozhdouar, biskoazh diskoulmet, biskoazh torret, biskoazh sevenet. (...) setu erru Nevez-amzer ar C'hoant. (...) Eus ar peurrivin, a gas betek netra an Nirvana, betek c'hoant diziwezh Eros. Eus ar gwall c'hoant da gaout dudi kaer (...) betek ar c'hoant bevañ bresk ha sioul-sibouron (...) Eus Philippe Desportes, a felle dezhañ bezañ renet gant ar c'hoant dispont nemetken, betek spleen santimantel Alain Souchon, en deus lakaet diskanoù hag eñvorennoù en hon fennoù : Mon premier c'est Désir...

Eus Kantik ar c'hantikou betek c'hoantoù diskiantet an trede milved-mañ en arvar, pep tra a chom war gorre ar gerioù. Ha krediñ asambles, en e greizon donañ. »

Sophie Nauleau, Renerez arzel « Nevez-amzer ar varzhed ».